

8N2-2-002

*un an euz ar re
wella*

4

Karantez dreist kement zo a zo red er bed-ma :
 Karantez d'ar vugale ha d'ho zud d'ho beva,
 Karantez d'ar gristenien ouz Doue, oud ho bro,
 Karantez a laz ar boan hag a drec'h ar maro.

Santez Anna venniget, etc.

Santez Anna venniget, selaouit oud pedenn
 Merc'hed ha martoloded a zo gwir gristenien,
 Ha kristenien e karfent kás d'ann neny ho c'haloun,
 Ken huel hag ar stered dreist gweled ar mor doun.

Santez Anna venniget, etc.

Ann tri dra a c'houlen nomp zo red, 'vel a c'houzoc'h,
 Evit harpa hor buez, beza hevel ouz-hoc'h :
 Heuilla lezenn hon Doue, ha goude kaout anken
 Mont d'ann neny, santez Anna, d'ho meuli da viken.

Santez Anna venniget, selaouit oud peden.
 Merc'hed ha martoloded a zo gwir gristenien,
 A c'houlen ouz-hoc'h bemdez, oud ho merc'h Mamm Doue.
 Douar ho bro pa varvint, Baradoz d'ho ene.

(PROPRIÉTÉ DE SAINTE-ANNE DE L'ILE DE BATZ).

En cédant la propriété de ce Cantique à Sainte-Anne de l'île de Batz,
 l'auteur désire qu'on n'y fasse jamais aucun changement ni dans le sens
 ni dans les mots.

G. M.

IMPRIMATUR : *Corisopiti, die 24 juli 1911.*

A. COGNEAU, V. G.


Mouillet e Kastel-Paol, e ti F. Manack.

KANTIK

SANTEZ ANNA

ENN ILIZ SANT PAOL E PENN ENEZ VAZ

— 13263 —



ENN iliz Paol e-kreiz an treaz,
 Em he zi-bedi e penn Baz,
 Ann neb a bed santez Anna
 Ne c'hoarvez drouk e-bed gant-ha.
 KANTIK ALL DA SANTEZ ANNA.

WAR DON : *Santez Mari, Mamm Doue.*

Santez Anna venniget, c'houi zo teir gweach euruz :
 Pried Joasim, mamm Mari ha mamm-goz da Jezuz ;
 Dreist-hoc'h n'euz bet, ne vez o-touez an oll gragez,
 War an douar, enn nenyou, nemet ho merc'h Gwerc'hez.

DISKAN :

Santez Anna venniget, selaouit oud peden
 Merc'hed ha martoloded a zo gwir gristenien,
 A c'houlen ouz-hoc'h bemdez, oud ho merc'h Mamm Doue,
 Douar ho bro pa varvint, Baradoz d'ho ene.

Ho puez gant sant Joasim zo bet santel-meurbet :
 Karet Doue, ober vad d'ar re boaniet er bed ;
 Ho madou e teir loden : unan roec'h d'ar beorien,
 Ann eil a roec'h d'ann Iliz, ha beva gant e-ben.

Santez Anna venniget, etc.

Eun' eal deut a-berz Douie d'e-hoc'h a lavaraz
 E vijec'h mamm da eur verc'h, eur verc'h a vije braz,
 Eur verc'h hag a lakaje ann nenvou da gana,
 Ann douar holl da dridall, an ifern da grena.

Santez Anna venniget, etc.

Eul labour ar re gaera voa hen-nez da ober,
 Genel a sevel eur verc'h evit Mamm d'hor Zalver ;
 Hag ho tivreach'h, ho kaloun, dre nerz Doue, zougaz
 Divreach'h ha kaloun Mari da veza leun a c'hraz.

Santez Anna venniget, etc.

Skouer priejou ha mammou oc'h bet hed ho puez,
 Skouer euz a bep madelez ; — c'houi voa leun a druez
 Oc'h kement den a welac'h e poan hag e glac'har ; —
 C'houi zo mad er Baradoz, evel war an douar.

Santez Anna venniget, etc.

Ho madelez, ho kalloud a zo kresket zo-ken ;
 Evit beza selaouet, n'ho peuz nemet goulenn.
 Selaouit, santez Anna, pedenn tud Enez-Vaz,
 Merc'hed ha martoloded e-kreiz poan ha mor braz.

Santez Anna venniget, etc.

Ama dirak hoc'h aoter, e penn iliz sant Paol,
 Daoulinet braz ha bihan emaomp o pedi holl.
 O c'houlenn war ar bed-ma digant ho madelez
 Evit hon tud, evid-omp, nerz, feiz ha karantez.

Santez Anna venniget, etc.

Ann nerz-se a c'houlenomp a c'houzoc'h a zo red
 Da verc'hét da labourat, ha d'ho martoloded.
 A rank mont pell dioud ho bro, ha pa ve rann-galoun,
 Da veva pe da verval war eur mor braz ha doun.

Santez Anna venniget, etc.

Santez Anna venniget, selaouit oud' pedenn
 Merc'hed ha martoloded a zo gwir gristenien,
 A c'houlen digan-e-hoc'h breur, map prieb ha tad
 Hag a c'houezo da biou e vezô dlêt ho mad.

Santez Anna venniget, etc.

Kaout feiz kre a c'houlenomp muioc'h egét madou,
 Evit mont goude mervel d'ann env gant hon tadou ;
 Feiz sant Paol Aurelien, kenta Eskop a Leon,
 Marvet e peniti-Baz ha choumet hor patron.

Santez Anna venniget, etc.

Santez Anna venniget, selaouit oud' pedenn
 Merc'hed ha martolodet a zo gwir gristenien,
 Ha kristenien e c'houzont n'ezuz nerz evit padout,
 Ma na deu ket feiz Jezuz da rei d'ezhi galloud.

Santez Anna venniget, etc.